

# DRE HENCHOÙ TREUZ AR BREZHONEG !

“Brezhoneg ar skol *versus* brezhoneg ar bobl ?” Alies e vez enebet ar modoù da gaozeal brezhoneg... gant gwir abeg a-wechoù, pa weler pegen diaes eo d’an dud en em gompren ha brezhonegañ an eil re gant ar re all. Diskoulmoù a c’hell bezañ kavet koulskoude evit tostaat ar rummadoù. En o zouez ez eus bet lakaet ur stummadur nevez war ar stern, Henchoù Treuz e anv. Pennad-kaoz gant Dewi Siberil, kenurzhier ar skipailh.

► **KOMZOÙ DASTUMET GANT MAXIME TOUZÉ**

**Pobl Vreizh : Petra eo Henchoù Treuz ha penaos eo ganet ?**

**Dewi Siberil :** Ur stummadur nevez ha dibar an hini eo ! Muioc’h-mui a dud a vez o teskiñ brezhoneg er skolioù, er c’hentelioù-noz, er stummadurioù hir hiziv an deiz... Un dra vat eo evel-just, youl zo gant ar re-se ha barrek int da gas ar yezh war tachennoù modern. Met ur wech tapet ul live yezh “standard” gante, n’eo ket gwall aes mont pelloc’h ha bezañ gouest da gomz ur brezhoneg yac’h ha livet-brav. Evit an dra-se n’haller ket tremen ’biou ar vrezhonegerien a-vihanik. Distank eo deuet an dud-se da vezañ siwazh, ha ne oar ket atav ar gomzerien nevez peseurt mod en em zerc’hel gante... Tout an dud o deus klevet anezhe o lâret “N’eo ket ar memes brezhoneg !”. Deus an tu all e vez tamallet dezhe “Ar re gozh ne fell ket dezhe kaozeal ganimp”. Ledan eo an troc’h etre an daou rummad. Re alies e chom sac’het an traoù, ha mestr eo ar galleg a-benn neuze. Koulskoude n’eo ket tonket an traoù da vezañ evel-se ! Ur pennad zo dija e oa en em vodet un toullad kamaraded deus Kreiz Breizh ha deus Treger prederiet gant an dra-se. Pa ’meump gwelet e oa tem Redadeg 2018 “ar brezhoneg liesliv” ’meump soñjet e oa arru poent sevel ar benveg a vanke : ur stummadur a-fetepañs evit sikour ar gomzerien nevez da vont war an tu-se, ha dre se ivez reiñ nerzh en-dro d’ar yezh er vuhez sokial. Setu kinniget ha choazet hor raktres gant ar Redadeg ! Un taol sikour ’meump bet ivez gant Rozenn Milin. Pourchas a ray dimp filmoù a-galite a c’hallimp implijout en hor stummadurioù.

**Evit piv eo ?**

Evit tout an dud barrek da zistripañ brezhoneg dija, ha gante ar c’hoant da vont (kalz) pelloc’h war-du yezh ar bobl. Savet ’meump ar stummadur-mañ gant ar soñj sikour an dud a zo enne ar garg da dreuzkas ar brezhoneg, ha pa vefent buhezourien, skolaerien, kelennerien, stummerien, kazetennerien, ha kement zo... met digor eo d’an holl evel-just ! Tout ’meump da wellaat hor mod da vrezhonegañ evit ma chomo bev ha yac’h hor yezh hag hor sevenadur.



Skipailh Henchoù Treuz

Skipailh Henchoù Treuz en un emvod prientiñ e dibenn ar miz tremenet.

**Peseurt palioù ho peus lakaet da Henchoù Treuz ?**

Meur a bal a vo d’ar stummadur-se : anavezout perzhioù dibar brezhoneg bro-mañ-bro (geriaoueg, ereadurezh, pouez-mouezh, sevenadur lec’hel...) evel-just, met dreist-holl bezañ kat da gompren ar vrezhonegerien a-vihanik ha da vezañ komprenet gante. Lakaet e vo ar gaoz ivez war ar mod da zarem-prediñ anezhe (pelec’h ha peseurt mod diskoachañ anezhe, deus peseurt sujedoù a vez brav kaozeal gante, peseurt plas reiñ d’ar galleg...). E berr gomzou, ar pal pennañ a vo reiñ alc’hwezioù d’ar stajidi, dezhe da vezañ emren evit mont pelloc’h o-unan goude-se.

**Penaos e vo kaset ar stajoù-se da benn ?**

Daou zevezh staj a vo kinniget e Rostrenn, d’ar 4 a viz Du ha d’an 2 a viz Kerzu. Ur miz etreze o daou eta... Evel-se o do amzer ar stajidi da “lonkañ” an traoù bet studiet, koulz ha da labourat er gêr diwar ar pezh a vo bet gwelet hag enrollet gante. Pep devezh staj a vo rannet e daou damm. Er c’hlas e vimp deus ar mintin evit labourat dre atalieroù a-bep seurt, ha war an dachenn goude merren evit toullañ kaoz gant brezhonegerien a-vihanik dre skipailhoù bihan (daou stajiad d’ar muiañ-tout asambles gant un den evit ambroug anezhe, gant ar pal lakaat an dud da gomz). Seul wech e fell dimp pediñ un den anavezet evit e varregezh war brezhoneg bro-mañ-bro. An taol-mañ eo Christian Duro an hini a zeuio da labourat war ur gontadenn bet desket digant e vamm.

**Ha goude ?**

Ur stummadur all a vo kinniget e Bear e penn-kentañ 2018. Goude-se e vefemp kontant da vont da lec’h all evit sikour da sevel stajoù war ar memes patrom. Ar gwellañ tra eo e teufe goulennou a-berzh an dud pe ar c’hevredigezhioù a fell dezhe mont gant ar memes hent. Labourat dorn-ha-dorn gant ar stummadurioù hir a vefe interesant ivez... Raktresoù all a vo ivez en dazont evit mont pelloc’h. N’eus ket amzer da goll ! ❖



Evit gouzout hiroc’h : skipailh.henchou.treuz@gmail.com